

**K**EVREDIGEZH

**T**I **A**R **B**REZHONEG



☎ 43.64.63.33

Pariz, d'ar 26 a viz Gwengolo 1989

# LIZHER T.A.B. NV. 3

Echu an hañv, ha pep hini da gregiñ en-dro gant e vuhez ordinal, gant diegi a-wechoù. Eman T.A.B. oc'h addigeriñ ivez, pal gantañ da vezañ ul lec'h a zudi evit ar vrezhonegerien mui ouzh mui ha kreizenn wirion ur sevenadur bev.

Bodañ e izili ur wech ar bloaz a zo ret da bep kevredigezh, al lezenn eo ( hini 1901 ), hen gouzout a rit. Divizet eo bet neuze pediñ ac'hanoc'h da gemer perzh en Emvod bloaziek T.A.B. a vo dalc'het d'ar sadorn 21 a viz Here, adalek 3e.

Roll-labour an Emvod a vo, evel m'eo boaz:

- Rentañ-kont ar c'huzul-merañ.
- Dilennadeg ar c'huzul-merañ nevez.
- Kudennoù all o tennañ da vuhez ar gevredigezh.

Na zisoñjit ket an deiziad, ha deuit niverus!

## DEIZIOU DIGORADUR:

Digoret'vez T.A.B. bep gwener da noz adalek 7e30. Abadennoù FR3 "chadenn ar vro" a vo kendalc'het o skignañ war ar skramm...nemet e vo ret gortoz teir pe beder sizhun a-raok ma vo degouezhet enrolladennoù nevez ganeomp.. .. Arabat digalonekaat memes-tra; ne vo ket paouezet ganto!

Adalek penn kentañ miz Here ha betek diwezh miz Du e vo digoret T.A.B. bep meurzh da noz da 7e. Goulenn'zo bet evit ma vefe tu da vrezhonegañ ivez diouzh ar sizhun hag ober a reomp neuze un taol arnod: ma teu tud niverus a-walc'h ez aimp pelloc'h gant ar meurzh!

"Kan ha diskan" a vo tu da zeskiñ ar bloaz-mañ c'hoazh. D'al lun eo, da 7e, ha n'eo ket d'ar sadorn ken, e vo graet ar gentelioù... Serj PLENIER an hini eo a vo ho kelenner! Ezhomm ebet ken ober bruderezh evitañ. Notit mat memes-tra deiziad ar gentel gentañ: al lun 2 a viz Here.

### PREZEGENNOU:

N'eus prezegenn ebet ma c'hellomp lakaat un deiziad dezhi evit c'hoazh. Traoù a zo war ar stern gant izili T.A.B. ha klasket'vo tizhout tud ampart en diavez eus ar gevredigezh ivez... Deiziadur ar prezegennoù a vo kaset deoc'h diwezha-toc'h, kerkent ha ma vo klokaet ar roll anezho ganeomp.

### PREDOU:

Ur pred a vo aozet e T.A.B. d'ar 22 a viz Here da greisteiz ( ur sul e vo ) evit klozañ ar staj brezhonek a vez dalc'het bep bloaz e skol-veur St.Denis gant ar gevredigezh K.B.D.P. Evit ar stajidi e vo graet ar pred-mañ da gentañ, met tu'vo da dud all kemer perzh ivez... Dav'vo deomp gouzout niver ar gouvidi ur sizhun a-raok memes-tra. Skrivit pe bellgomzit deomp neuze!

Ur pred all a vo d'ar 19 a viz Du da greisteiz hanter ( ur sul c'hoazh ! ).. Ezhomm hon eus gouzout resis pet kouviad a vo ar wech-mañ, ha setu perak e c'houlennomp diganeoc'h kas deomp en-dro, leuniet a-zoare, ar folennig a zo da zistagañ e fin al lizher. Ho pet soñj memes-tra da lakaat 30 lur a-gostez evit ar pred!

### UR RAKTRES: DEVEZHIOU-STUDI E T.A.B.:

Krediñ a reomp e vefe un dra a-bouez evit T.A.B. ma c'hellfe reiñ d'e izili, ouzhpenn un digarez da doullañ kaoz e brezhoneg, un tu ivez d'en em stummañ ha da vont pelloc'h gant anaoudegezh hor yezh. Nebeut-tre a lec'hioù'zo m'eo posubl kaout ur stummadur e brezhoneg enno: skolioù-meur Roazhon ha Brest, STUMDI e Treglonou, kampoù brezhonek e-pad an hañv...ha setu. Netra e Pariz pe en e rannvro avat ( stajoù MAFPEN a zo, met evit kelennerien an deska-durezh publik int dreist-holl. ).

Soñjet hon eus neuze er raktres-se: aozañ devezhiou-studi e brezhoneg a vefe gouezet d'un danvez resis pe resisoc'h hag o tennañ d'hor yezh ( yezhadur, rannyezhoù, istor ar yezh h.a. ) ha se, gant skoazell kelennerien a-vicher pe brezegennerien ampart.

An dud a vennomp tizhout avat ( evel kelennerien ar skolioù-meur ) a zo an darn vrasañ anezho o chom e Breizh, ha ret e vefe evel-just, ha d'an nebeutañ holl, paeañ dezho o frejoù evit dont da bPariz ( an treñ mui ar c'housked )... Pezh ne c'hell ket T.A.B. ober e unan, abalamour d'an dister m'emañ an arc'hant en e gef.

Ret e vefe neuze d'ar berzhidi bezañ diouzh o gwenneien, met marteze e talvezfe ar boan... Etre 50lur ha 100lur, hervez niver an dud, e vefe tu d'hor soñj laka-at priz un devezh.

Met a-raok mont pelloc'h gant ur seurt raktres eo ret deomp gouzout pet den a vefe dedennet ; 20 o vezañ an niver na vo ket tu mont didanañ . setu ma c'houlennomp diganeoc'h, ur wech c'hoazh, leuniañ ar folennig e fin al lizher ha kas deomp ho respont an abretañ ar gwellañ. N'eo nemet diwar ar respontoù kentañ-se ma'vo gwelet ha posubl e vo aozañ devezhiou-studi e T.A.B.

KELEIER ALL:

Evit echuiñ e roomp deoc'h da c'houzout e vo aozet ur "staj kembraeg" gant Ffion JONES ha Helen WYN ( o div eus Bro-Gembre ) d'an deizioù amañ da heul:

- 11-12 a viz Du
- 25-26 a viz Du
- 16-17 a viz Kerzu

M'ho peus c'hoant kaout titouroù, ( priz ha lec'h ar staj ) pellgomzit da gK.B.D.P ( 43.84.26.03 ) pe da dT.A.B. war eeun.

---

TI AR BREZHONEG  
15 RUE DES TOURELLES  
75020 PARIS

---

-----  
Anv :

Chomlec'h:

PRED AN 19 A VIZ DU

- Dont a rin
- Ne zeuin ket

DEVEZHIOU-STUDI

- Dedennet on ha prest da baeañ
- N'on ket